




DOUE HA BREIZ



KANTIK

ITRON VARIA-AB-PORZ-GWEN

ENN PARROUZ PERWENAN

Eskeopti Gregor



War don : *Bossen Elliant.*

DISKAN :

*Itron Varia-ar-Porz-Gwen,
Chilcoet, mar plij, hon feden :
Ni c'houlen ma veset bepret
Stereden hon martolodet.*

I .

‘Doue ~~enn~~ dervez a laraz
D’hon zad-koz Adam, pa bec’haz :
« Diwezatoc’h da bep-hini
Vo ret labourat raok dibri. »

II .

War ar mor don hon bugale
Renk mont da c’honit ho bue.
Gwerc’hez zantel, mar hon c’haret,
Diouz a bep drouk ho diwallet.

III .

Ho miret diouz ann avel foll,
Harzet n’afe ho lest da goll ;
Gret ma tistroint holl d’ar ger
Korf hag ine iac’h ha zeder.

IV .

War hon listri ni ia ive
Da besketa enn noz, enn de ;
Ha wit ann oac’h, ha wit ar wrek,
Ha ! pebez doan diouz ar gerrek !

V .

Na ped den a zo bet lonket,
War dro, gand ar mor kounnaret !

Na ped, aman war vord ann od,
A skuill daero d'ar martolod !

V I .

Paneved e zoc'h ar vam vad,
Muioc'h c'hoaz a vije hep tad,
Muioc'h a vije hep pried.
O mam Jezuz, bezet meulet !

V I I .

Wit binigan ann dud a vor
Dalc'h-mad ho tivrec'h zo digor.
Na pebez joa d'imp Porzgwenniz,
Ha dac'h ive Bugeleziz !

V I I I .

Leromp 'ta, holl dud Perwenan,
Ha doustadik, ha dre hon c'han :
Itron Varia-ar-Porz-Gwen,
Hon diwallet a bep anken !

I X .

Evel gwech-all hon zent Gweltraz,
Gondval, Modez ha Nikolaz,
Eromp dezi a vouez huel :
Ni a vo dac'h bepret fidel !

X.

Ha neuze pa deio ann de
D'imp-ni da guitaat ar vue,
Ganac'h, Rouanez ann Envo,
D'ar baradoz ni a ielo.

Evelse bezet gret !

Ol. L.

IMPRIMATUR.

Brioci, die 1^a Septembris 1894.

LE PROVOST,

v. g.

